



Lenn ha klokaat



Setu ur robot. Lenn an urzhioù ha gra ar pezh a zo goulennet evit klokaat anezhañ.

- 1) An divskouarn a zo daou gelc'h melen bihan.
- 2) Du eo an treid.
- 3) An daoulagad a zo tric'hornioù gwer.
- 4) Ar fri a zo ur ront orañjez.
- 5) Gwer eo an divrec'h ha glas an divc'har.
- 6) Ur steredenn gwer a zo e kreiz ar c'hof.
- 7) Melen eo an daouarn.

Lenn ha klokaat




Setu ur gambr. Lenn an urzhioù ha gra ar pezh a zo goulennet evit klokaat anezhi.

- 1) Ur plac'h vihan a zo o kousket er gwele.
- 2) Orañjez ha melen eo rontoù ar voger.
- 3) Ur vesel* leun a vleunioù roz a zo a-us d'ar burev.
- 4) Liñselioù* ar gwele a zo glas sklaer.
- 5) Melen eo al lamp e-kichen ar gwele.
- 6) Gell eo ar burev.
- 7) Gwer eo an tapis.
- 8) Ur c'hazh gris a zo o kousket war an tapis.

*Sikour : * ur vesel : un vase / * liñselioù : des draps*

Lenn ha klokaat




Setu un ti hag ur park. Lenn an urzhioù ha gra ar pezh a zo goulennet evit klokaat an dresadenn.

- 1) Gwer eo mogerioù an ti.
- 2) Gwelet e vez tri labous e-barzh an oabl.
- 3) Heuliet eo an houadez * gant daou houad bihan.
- 4) An ti a zo etre div wezenn.
- 5) Glas eo dor an ti.
- 6) Ur paotr bihan a zo o vale war an hent etrezek* an ti.
- 7) Gris eo an tri dañvad.
- 8) Ar vuoc'h he deus daou dach du.

*Sikour : * an houadez : la cane / * etrezek : en direction de*


Lenh ha klokaat



Setu un abadenn sirk. Lenn an urzhioù ha gra ar pezh a zo goulennet evit klokaat an dresadenn.

- 1) Gwer ha melen eo tok an olifant.
- 2) Gris eo al logodenn.
- 3) Ruz eo ar ridozioù.
- 4) Glas ha melen eo ar volotenn a-dreñv an olifant.
- 5) Ruz eo ar steredennoù.
- 6) Gra div volotenn mouk etre al logodenn hag an olifant.
- 7) Gra un tok d'ar furlukin a zo kuzhet a-dreñv ar ridoz.
- 8) Livañ e roz sae ar plac'h gant blev du.

Lenn ha klokaat



Setu tud war an draezhenn. Lenn an urzhioù ha gra ar pezh a zo goulennet evit klokaat an dresadenn.

- 1) Un dienn-skorn chokolad a zo gant ar plac'h vihan.
- 2) Melen ha gant roudennadurioù* ruz eo dilhad neuñvial ar plac'h vihan.
- 3) Pemp banniel a zo war ar c'hastell bras.
- 4) Ruz eo blev ar paotr bihan gant ar bragoù berr*.
- 5) Meleganez eo ar plac'h.
- 6) Orañjez eo ar boue.
- 7) Dindan an disheolier* ez eus ur serviedenn roz.
- 8) Melen eo troad an disheolier.

*Sikour : * roudennadurioù : des rayures / * bragoù berr : short / disheolier : parasol*

Lenh ha klokaat




Setu ur gegin. Lenh an urzhioù ha gra ar pezh a zo goulennet evit klokaat an dresadenn.

- 1) Glas eo ar c'hastelodennoù.
- 2) Tresañ ur blantenn gwer e-barzh ur pod dirak ar prenestr.
- 3) Livañ ar bananezennoù e melen.
- 4) Tresañ un asiedenn dirak div gador.
- 5) Livañ ar voestad riz e gwer.
- 6) Tresañ div werenn e-kichen an dar*.
- 7) Gell eo ar c'hadorioù.
- 8) Gris eo an horolaj.

*Sikour : * dar : évier*

Lenn ha klokaat



Setu un ti-feurm. Lenn an urzhioù ha gra ar pezh a zo goulennet evit klokaat an dresadenn.

- 1) E-barzh an oabl e vez gwelet an heol etre div goumoulenn.
- 2) Orañjez eo toenn an ti-feurm.
- 3) Gell eo ar saout er park a-zehoù.
- 4) Daou bemoc'h roz a zo er c'hloz*.
- 5) O reiñ boued da div gwaz ha tri yar emañ ar venajerez*.
- 6) Daou vugel a zo o c'hoari er porzh gant ur volotenn.
- 7) Ruz eo an traktour.
- 8) Du eo ar marc'h er marchosi*.

*Sikour : * er c'hloz : dans l'enclos / ar venajerez : la fermière / marchosi : écurie*